

## FIZIANS EN AMZER DA ZONT ?

Anat eo e ya donoc'h broioù industriel Europa e-barzh enkadenn ar petrol. N'eo ket avat ar petrol nemetañ a vefe ret komz anezhañ, enkadenn hor sevenadur, hon doareoù-bevañ ha betek hon doareoù-soñjal eo.


Petra a c'hoarvezo e gwirionez ? Feiz, den ne oar. Marzin a zo marv pell zo, ha den n'eo gouest da ziouganañ an dazont, kent tost ha ma vefe hemañ, gant ma cheñch ken buhan red an traoù. Gant an darvoudoù nevez e vo roet ur chañs marteze d'ar broioù bihan, evel hon hini, da vevañ adarre.

M'en defe dalc'het (ha ma talc'h) an traoù da vont evel mo' deus graet arak an taol spontus a zo bet skoet gant Europa, e vije tonket Breizh, hag ar broioù bihan « war-lerc'hiet » asamblez ganti, da vont war he diskar. E diwezhañ ar c'hantved, ez eus bet diouganet meur a wech, e vefe distroch'h al lod anezhi e-barzh ar vro c'hwec'h-kogn hag e-barzh an Europ dre vras. Kement-mañ a zo gwir evit Iwerzhon, Kembre, Okitania, hag all. Ne vefe nemet kêrioù bras (ha pa lavarer « kêrioù », tolpoù-tud divent eo kentoc'h) e kreiz Europa industriel, hag ar gouelec'h, bro ar vakañsoù, bro an natur « disaotr » e lec'h all. Ne vefe hon bro nemet ur rannvro morgousket, diwad, aet kuit he yaouankiz diganti. An divroañ ne vo ket anezhañ ken, rak ne vo ket awalc'h a dud yaouank da zivroañ. « Kudenn Vreizh » ne vo ket anezhi ken, rak ne vo ket awalc'h a dud yaouank enni da sevel o mouezh...

Setu an dazont a vez prometet deomp. Ha ni o stourm koulskoude da adsevel ur vro n'he deus ket he flas ken e-barzh framm Ekonomiezh Meur Europa ar Bloavez 2000. Ha ni o stourm evit un doare-bevañ, ur yezh a zo mat da ganañ marteze, pe da sevel barzhonegoù, met na dalvez da netra pa vez kaoz eus ober ur soavon-kouez modernoc'h ha kirri-dre-dan herrekoc'h...

Daoust hag e stourmomp evit traoù a zo stag ouzh ur bed o vervel, pe aet da Anaon dija e lec'hioù zo ? Evidomp-ni eo sklaer ar respont. N'hon eus ket c'hoant da zistreiñ d'ur « Baradoz Kollet » : gouzout a ouzomp n'eus bet gwechall Marevez Aour ebet, paneve d'un dornadig tud. Gwechall e oa muioc'h a gañv eget a jabadao, muioc'h a zevezhioù bihan eget a zevezhioù bras.

N'eo ket diouzhtu e vo cheñchet menozioù an dud, nag o c'hoantoù. Diskouezhet he deus solann avat enkadenn ar petrol ne c'hell ket oberiadur madoù hor c'hevredigezh industriel mont war raok bepred, buanoc'h-buanañ. Diskouezhet he deus ivez ez eus traoù er bed a-vreman hon eus ezhomm anezho, traoù all avat a zo koulz didalvez hag e c'heller ober hepto aes. Paliou ar vuhez ne vint



« TOLPOU-TUD DIVENT »

ket kaoz 9 chadenn skinwel ha 3 pellwelerezh, da selout outo a-hed an devez.

Daoust hag e vo muioc'h troet an dud ouzh menozioù all hiviziken ? Stourm evit Breizh n'eo ket stourm a-enep ur vro bennak, n'eo ket stourm evit un toulladig tud hag ur c'horn-douar strizh, stourm evit un doare-bevañ, evit ur sevenadur eo na vo ket troet hepken ouzh kreskidigezh ar PNB, ouzh madoù materiel didalvoud nemetken.

## ar brezhoneg hag ar skiantou

Savet eo bet ar skiantou gant an dud evit o skoazellañ en o buhez. Muioc'h mui eo bet rannet ar pobloù a-hed ar c'hantvedoù tremenet. Pelloc'h pell emañ an hini desket diouzh ar re all. Met ar skiantour a rank krouiñ gerioù nevez en e yezh ha darn o deus kemeret anezho e yezhoù evel ar gresianeg pe al latin. Evelse e vez savet skiantou gant skiantourien hag evit unan hepken ; n'eus ket tu da dud all kompren ar pezh a zo bet kavet pe brederiet warnañ. Ar c'hontrol eo peurliesañ evit ar brezhoneg ma vez klasket gerioù nevez ennañ e-unan. Ha ret eo kenderc'hel gant an hent-se evit bezañ komprenet gant kalz tud. Ur skouer eo ret dibab : ma

komzan gant ur paotr war ar maez pe en ur gêr e lavarín : « Studiañ a ran douarouriezh. » Evelse e kompreno ar paotr ez eus ul liamm etre an douar hag ar pezh a studian. D'ur skiantour e lavarfen « Studian a ran geologiezh », rak etrevroadel eo. Arabat eo din komz a-ziwar geologiezh ouzh ur paotr n'eo ket desket rak ne gompreno ket hag eñ e studian war al laboused, war an douar, war an dour, war al loar pe me oar... E brezhoneg ez eus tu d'ober gerioù skiantel arnevez hep bezañ re zesket ; greomp e-giz -se pa'z eus tu, da lavarout ha pa n'eo ket re hir ar ger nevez-savet ; rak ne vo ket implijet ar ger hir gant an dud, ha mervel a

raio arak pell. Greomp gant ar ger etrevroadel diouzh ret en ur zisplegañ d'an dud ar pezh a dalvez. Evit-se eo ret komz brezhoneg hepken evit bezañ boas da c'hoari gant gerioù a bep seurt. Tonket eo d'hor yezh da vevan drezomp ; tu vo neuze da zisplegañ ar skiantou en un doare a-soc'h e brezhoneg eget e meur a yezh all. Deomp eo stourm a-enep ar chrennlavar gall « Mervel a raio bremaik ar brezhoneg rak n'eo ket gouest da sevel gerioù skiantel arnevez ».

Armél RENAULT

# evid deski komz brezoneg mad

Mond a ran da gonta deoh ar pezh am-  
eus greet war dachenn ar brezoneg da geñ-  
ver ehan-labour an hanv (1973).

P'edon e Porspoder, e miz Gouere, em-  
eus bet tu da gomz brezoneg tamm pe  
damm, e lehiou 'zo; ha dreist-oll gand  
va mamm, va zad ha va mamm-goz hag  
a oa ganeom. Klasket em-eus ive, an alie-  
sa ma hellen, marvailled e brezoneg gand  
tud a anavezan e parrez Porspoder : ke-  
rent, amezeien hag all... A-benn ar fin  
ne veze komzet nemed brezoneg ouzin  
gand tud 'zo, p'en em welem er vourh,  
goude an overenn, ha n'eus forz e peleh.

Ma 'z eus bet brezoneg ganin e miz  
Gouere, ez eus bet muioh c'hoz azaleg  
ar 15 a viz Eost. En deiz-se e oa kroget  
gand staj « Al Leur Nevez » e Kastell-  
Paol. Va ano am-oa lakeet da vond.

Bez e oa daou staj e gwirionez : unan  
e Kastell, hag unan all e Lezneven, er  
Vro-Bagan hag er parrezioù all vro-war-  
dro. E Kastell e oa pemp stajiad, daou  
vreur euz an Haor-Nevez, daou baotr euz  
a Vreiz-Uhel, med o chom e Pariz, ha me.  
War-dro Lezneven, avad, e oa muioh a  
dud : eun trizeg bennag. Al lodenn vrasa  
a oa studierien anezo.

Penaos eo bet tremenet an traou ?

Chom a ree ar stajidi e-barz an atan-  
chou, da lavared eo gand brezonegerien a-  
vihanig. Labouret e veze bep mintin ha da  
houde lein ivez. Bez e veze avad, eur gen-  
tel vrezoneg ganeom beb eil dervez, d'an  
abardaez. Mikael Madeg eo an hini a ree  
war-dro ar henteliou. Renner ar staj e oa.  
Da skwer, hennez e-noa eur gentel da ren  
evid tud Lezneven d'al lun, hag antronoz  
unan all e Kastell-Paol evidom. N'eo ket  
al labour eo a vanke dezan. Eur gentel a  
bade peder eurvez orolaj dre vraz, gand  
eur frapadenn diduadenn memez tra. E-  
pad an amzer-ze e veze greet eur bern  
traou : fonologiez, distagadur, — gand  
skoazell ar zonskriver — kelhiou-studi ha  
me oar-me.

Lodenn bouezusa ar staj, koulskoude, a  
veze an atanchou. Pa vezem er parkeier  
pe ouz taol o leina hag o koania, pa ve-  
zem o tiskuiza pe o labourad, e vezem  
atao gand an ozah, ar vevelien, an ame-  
zeien pe tud all en ti. Hag ez ee ar goaz  
e brezoneg, kenetrezom, evel just.

Edon o loja, evid va lod, e ti ar Saillour  
e parrez Plouenan ; eun all a oa o chom  
e Kastell, hag eun all e Trelaouenan. Tri  
a vugale a zo o veva en atant m'edon-  
me. Med n'ez eus tamm brezoneg ganto.

Bez ez eus bet ive prezegennoù e bre-  
zoneg. Setu aman anioù ar re o-deus bet  
komzet ouzom : Ronan Huon, Per Chapa-  
lan, mer Gwinevez, Charlez ar Gall, Fanch  
Morvannou ha Yann-Ber Duval, sekretour  
« Al Leur Nevez ».

Evid deski ar yez eo pouezuz-kenan  
galloud mond er mod-se e-touez tud ar  
bobl. Ar re-ze o-deus eur brezoneg mad  
ha yah, hag en eur labourad ganto em-  
eus tu d'o hompren eun tammig muioh.

B. GRALL (Brest).

## HOL LENNERIEN A SKRIV

Aotrou ker,

Degouezet eo din nevezig 'zo gwe-  
lout ur « gelaouenn » (?) hudur e  
brezhoneg. « Yod Kerc'h » eo e vez  
graet diouti, sañset. Ma n'eo ket ur  
vezh ! Gand petra a vez troet an dud  
yaouank en deiz a hiziv ! Hag ober  
gant hor brezhoneg santel, « breur  
d'ar feiz », e giz ma lavare ar re  
gozh, da voulañ nouspet bouedmoc'h  
(ma ! ar moc'h e zo loened inosant,  
da nebeutañ). Heuget on, hag eonen-  
nañ a ran gant ar vuanegez.

E-barz « Dihun » ne vez ket kavet  
traoù lous a seurt se. Diotachou ur  
wech an amzer, mes ne c'hell ket  
bezañ lemm hor spered bep miz, se  
'zo sklaer. D'am soñj-me ez eo « Di-  
hun » ur berlezenn e-barh ur mor a  
fank. Dalc'hit gant ho hent !

Filomena B., karabasenn (Bro-  
Leon).


Emaomp a du ganeoc'h. Siwazh !  
Eman « Yod Kerc'h » oc'h ober berzh,  
ha hi moulet fall, embannet gant n'eus  
forzh piv, ha skignet n'eus forzh pe-  
naos. N'omp ket re nec'het avat, Ar  
re-se a zo paour-raz bete vremañ, ha  
n'int ket evit moulañ fotoioù. Ni a  
c'hell ober an dra-se. Goulennet hon  
eus digant rouanez kelc'h keltiek  
Erdeven ul luc'hskeudenn « giz  
noaz », a vo embannet ker kent ha ma  
teuio « Yod Kerc'h » da vezañ dañ-  
jerus evidomp.

## DRE AR VRO

Breiz e skolaj Sant Varzhin (Roazhon)  
Kentelioù brezhoneg ez eus abaoe pevar  
bloaz, heuliet er bloaz-mañ gant 12 %  
eus ar skolidi. Ar menoz breizhat a zo  
aet war-raok a-hend-all ha kemeret en  
deus stumm ur strollad brouderzh. Petra  
a vez graet gantañ ? Un dek bennak a  
baotred a zesk seniñ bombard, un daou-  
ugent bennak a baotred hag a verc'hed a  
zesk koroll, aozet e vez diskouezadegoù,  
prezegennoù (Breizh hag he c'hudennoù :  
Y. Olier. — Lennegezh ha yezh Breizh :  
P. Denez. — An arzh keltiek : X. Lan-  
gleiz. — Armerzh : A. Durant. — Politi-  
kerezh Breizh : Y. Olier. — Ar c'humu-  
niezh : M. Louarn).

Bodet e vez strollad bep sizhun evit  
prientiñ pennadoù-skrid e-barzh kelaouenn  
ar skolaj hag evit studiañ ur gudenn ben-  
nak. Kalz tud o deus goulennet ober traoù  
all evel deskiñ gourenn, seniñ, an delenn,  
deskiñ Kerneveureg, kembraeg hag iwer-  
zhoneg, sevel ul laz-kanañ. Ar pezh a ra  
diouer deomp avat eo tud gouest d'hon  
harpañ. Plijout a rafe dimp kenañ anave-  
zout hag eñ e vez graet hevelep traou e  
skolioù all, ha spi hon eus e vo heuliet  
hon skouer gant kalz tud yaouank all.

BREIZ — Pajenn 8



## abadennoù rannvroel an drede chadenn

Pep hini a oar ez eo gouestlet an drede chadenn d'ar rannvroioù. Deut  
omp a benn da skrapat digant an ORTF skouerioù eus an abadennoù a vo  
skignet en hor bro pa'z aio an drede chadenn en dro.

19. 00 Abadenn Vrezhonek (1).

19. 01 Keleier Rannvroel

Debret e vez krampouez war vourzh ar « Jeanne ». — Buhez kalet ar  
berseptourien e Breizh. — Pajenn al labour-douar : penaos mont da  
glask labour war-dro Amiens.

19. 30 La Bretagne défigurée

Penaos ez eus bet laeret ur statuenn gozh a Sant Herve en ur mirdi  
e Paris. — Saotret e vez hor mogerioù gand enskrivadurioù diot.

20. 30 Tout va très bien Monsieur Messmer

Ur film gant Carole Lombard, Marlène Dienesch, Charlie Plevin hag  
ar mim Marcellin.

21. 30 Breiz o veva

21. 31 Interclôches

Abadenn gant Guy Lux. Etre Kerblouk ha Lanbiniou. Gwelet e vo :  
redadegoù moc'h, klask ar soavon (an hini a gavo un tamm soavon  
en e c'hêriadenn a yelo ar maout gantañ), redadeg ar skolidi betek  
uzinoù Paris (hep distro), h.a.

22. 30 Fin an abadennoù

19. 00 Buhez parrezioù Breiz (e brezhoneg) (1)

19. 01 Keleier rannvroel

Ur rafinerzh nevez en Oriant. — Madame Soleil o tiskuizhañ e Pont-  
'n-Abad.

19. 30 Le Francophonissime

gant komzerien kreizennoù skinwel ar broioù galleger : Toussaint  
Paoli, Jean Hirigoyen, Paul Hammerschmidt, Marcel Heuvelmans ha  
Corentin Guezennec. An hini a deuo gantañ ur ger e trefodach e rann-  
vro a vo koll.

20. 30 Les arrières

Ur pezh c'hoari o tremen e Plougastell-Daoulas. Ur Parizian pinvidik,  
erru skuizh gant buhez ar Gêrbenn, a ya da chom en ur gêriadenn war  
ar maez e Breizh ha ne gav nemet sotoni, loustoni, kasoni en dro de-  
zhañ. C'hoariet gant Louis de Funes ha tud ar vro.

21. 30 Kentel vrezoneg Visant Seite (1)

21. 31 Nomenoe oe !

Gant Jacques Riou. Gand Pierre Dubois (Nomenoe), Jean-Louis Dupont  
(ar foeter-hent), Eugène du Castel du Seixième (Izidor), Janine Mariol-  
les (Madalen), hag all. C'hoariet e galleg, gand is-tilloù e brezhoneg.

22. 30 Fin an abadennoù

(1) O vezañ ma vo diskrog paotred an ORTF diouzh o labour en deizioù-  
se, ne vo ket skignet an abadennoù-mañ.

# ★ RAGISTOR AR SINEMA ★

Kent kavout an doare d'ober da skeudenoù finvus tremen dirazomp war skramm ur sal teñvalaet, eo bet ret ijinañ an doareoù d'o stabilaat war danvezioù kizidik. N'eo ar sinema a-benn ar fin nemet heuliañ reizh kavadenñ ar fotografiezh.

## Ar fotografiezh

Kozh-Noe eo ar c'hiz da luc'havannañ skeudenoù sinaek war ar mogerioù. Koulskoude n'eus ket ken pell zo — se c'hoazh eo bet dizoloet ar gambr du ma s'helljod a drugarez dezhi ijinañ ar fotografiezh.

Er XVIvet kanved eo e kav Leonarz de Vinci diazezenn ar gambr du. Hogen ret e vo gortoz Della Porta evit diskuliañ an doareoù anezhi. Implij a reer ar gambr du evit leternioù-skeudenoù adalek ar XVIIvet kantved.

E 1757 eo dizoloet gant Beccari oberiegezh ar goulou war un danvez kizidik : ar c'hlorur arc'hant.

E 1802 e kaver meneget en un danevell arnodou gant ar saoz Wedgwood ar fotografiezh evel doare da stabilaat ar skeudenoù war ur gwiskad danvez kizidik ouzh ar goulou gant skoazel ur gambr du. Hogen tavet e voe war gavadenn hemañ.

Hor c'hentañ klichedoù padus a vo savet e 1822 gant Jozeb Nikefor Niepce. Implij a ra hemañ un asfalt evel gwiskad kizidik hag e pad an dalc'hioù a-wechoù betek dek eur e-kreiz an heol.


Gwellaet e vo kavadenñ Niepce ; amzer an dalc'h zo berraet da dri munut gant Daguerre e 1839. Daou vloaz war lere'h ne bad mui nemet pemp eillienn gant ferennegoù-tra peder ferenn dezho e-lec'h div (ferennegoù Woigtlander) : gallout a reer bremañ tennañ klichedoù eus traoù n'emaint ket dre ret dindan an heol. Fox-Talbot a ijin an negativ e 1847. E 1871 eo kouezhet amzer an dalc'h d'ur gantvedenn vunut gant implij ar gelatin-bromur da c'houd Madox. Hag adalek 1884 eo'h implij Jord Eastman ar filmoù gwevñ (graet e kelluloïd goude ur pennad) e-lec'h ar plakennoù gwer.

Diwar daou dra eo bet ijinet ar sinema : stabilaat ar skeudenoù evel m'emaomp o tont eus a welout hag o lakaat da fiñval. Ar poent-mañ a vo gwellet bremañ.

## Al loc'h

Adalek ar XVIIvet kandved eo'h anavezet al letern-skeudenoù dre holl : talvezout a ra d'an dermajied da estonañ ha da voemañ an dud. Ne fazi ket d'ar skeudenoù nemet fiñval. Dalc'hus-ted ar skeudenoù war ar skramm-lagad zo ur fed anavezet abaoe Ptoleme marteze. Koulskoude n'eo nemet e 1832 e teu Jozeb Plateau a-benn d'e zezrannañ ha d'adgenaozañ al loc'h gant un ardivink savet gantañ, ar Fenakistikop. Adkempennet e vo hemañ gant Hoerner evit rein e 1834 ar Zootrop. Skeudenoù o taolenniñ pep koulz eus ar fiñvadenn a veze treset lec'h ouzh lec'h war ur vandenn baper ha lakaet e diabarzh ar benveg. Goude e lako Duboscq fotoioù e-lec'h an tresadennoù hag e 1870 e teu Heyl a-benn da luc'hvannañ klichedoù finvus (da c'houd un niver mat a dao-lioù arnod chomet aner evel re Franz von Uchatius).

Ur fuzuilh fotografek a sav Marey e 1882 : gant homañ e c'heller digenaozañ al loc'h en ur gemer daouzek skeudenn dre eilienn : hor c'hentañ kamera eo



AR SINEMA WAR-DRO 1900

mar karit. Diskouez a ra Marey n'eus ezhomm nemet eus dek skeudenn dre eilienn evit adsevel al loc'h. Neozh n'eo tamm ebet dedennet gant an dra hag e tro e enklaskoù war danvezioù all pa oa ken tost eus dizoleiñ ar fotografiezh.

Jord Demeny gant harp ar binvioù savet en e raok a gasas da benn krouiñ un ardivink d'adgenaozañ ul loc'h tennet triwec'h skeudenn anezhañ gant Kronofotograf Marey : añvet e voe e venveg Fonoskop ha testenieketaet e 1892. Hogen ne voe ket soñjet luc'hvannañ an adgenaozidigezh-se ; ar skeudenoù a veze douget gant ur gantenn hag evel-se n'hellent ket bezan gwall niverus.

E 1877 e sav Emil Reynaud ur zootrop klokaet a anvas Praksinoskop : gant ar benveg-mañ e vez distaolet ar skeudenoù gant ur meleziour hag o luc'hvann war ar skramm. Abadennoù luc'hvannañ tresadennoù a savas hag a voe anvet C'hoariva Optek ; abadennoù a dolpe a-wechou betek pemp kant arvestour. Re e prize talvoudegezh arzel an tresañ evit lakaat klichedoù e-lec'h ar skeudenoù treset. Sevel a reas bandennoù betek seizh kant skeudenn warno ha peurdoulet evit o c'has war raok.

Un doare sinema evit un arvestour hepken a vo graet gant Edison gant e g-Kinetoskop. Ne yay ket pelloc'h ; koulskoude deuet eo d'ar sinema ar mare da vout kavet breman.

## An ijinadenn


Diaes eo komz eus ijinadenn amañ rak kavout diazennoù ar sinema n'eo bet nemet kenderc'hel reizh gant an holl enklaskoù graet en a-raok. A drugarez d'an holl gavadennoù graet araozañ en deus gallet Loeiz Lumière gant skoazel e vreur Aogust sevel ar benveg testenieketaet e 1895 dindan an termenadur « Benveg evit talvezout da sevel ha da welout an amprovennoù kronofotografek ». Tabutet ez eus bet e-pad pell evit gout hageñ ez eo Lumière e gwirionez ijinour ar sinema ha gallout a raimp pismigañ c'hoazh. Drezañ e unan n'en deus ket Lumière krouet kalz a dra. N'en deus graet

nemet kenstrolañ menozioù dispaket gant re all. Koulskoude war lere'h e desteniekadenn eo en em ziorro en ur feson souc'hus a-walc'h ar benveg anvet sinematograf.

An abadenñ sinema gentañ a voe graet d'an 22 a viz Meurzh 1895 e Paris. Luc'hvannet e voe ar film anvet « Micheourien o tont er-maez eus labouradeg Lumière ». An arvest-se a voe prevez. Dalc'het e voe an abadenñ foran gentañ er « Chafedi Bras » e Paris atav.

Koulskoude n'o deus ar vreurdeur Lumière gwellet er sinema nemet un doare d'adtaolenniñ an traoù. Ret e vo gortoz reoù all war o lere'h evit ober eus ar sinema un arvest. Al Lumière-ed o deus savet ar benveg. Tud all evel Melies ha Griffith a zesko e embreger. Ha ne vo nemet goude ar re-mañ e c'hellimp komz eus ur seizhvet arz.

Lukian Kergoat.



Ar Fenakistikop

« Ar vailhed a lavar ez eo dic'hallus dourañ an Negev ? Kemmit ar vailhed ! » (Ben Gourion).

# SKINGOMZ HA SKINWEL

NEDELEG LAOUEN ha BLOAVEZH MAT d'an holl vignoned !

Da gentañ, pediñ a reomp ar geneiled da zigareziñ « Dihun » evit bezañ chomet mut diwar-benn « Skingomz ha Skinwel » ur pennadig mat zo. An abeg eo diloadeg rener « Dihun », hor mignon Bozeg, aet da chom, eus Montroulez da benn all Bro-Leon. Da heul an diloadeg, pennadoù kaset ganimp d'ar chomlec'h kozh (ne oa ket bet meneget an hini nevez war ar gelaouenn) a zo bet kollet. Ma setu reizhet an traoù !

Karet hor befe e dibenn ar bloaz-mañ, reiñ keleier kalonekaüs d'hor mignoned, hogen, siwazh, emamp bepred en despet da youl vat Charlez ar Gall hag e genalabourerien, gant ur skingomz hag ur skinwel eus ar re reuzedikañ, beuzet en ur mor a c'halleg.

Un tammig spi hor boa bet da gaout ur wellaennig bennak pa oa bet aüvet an Ao. Conte e penn an ORTF peogwir hemañ a oa, emezañ, ur rannvroeler kataloniat. Da heul al lizher gourc'hemennoù hor boa kaset dezhañ hor boa resevet ur respont hegarat-tre o prometiñ lakaat hor goulennoù dirak bodadeg kentañ kuzul-ren an ORTF. Siwazh, ur bro-mesa muioc'h n'eo ket ken !

Ma, arabat fallgaloniñ !

Pa eo bet roet e sac'h da Conte gant ar gouarnamant ha roet blas da Marceau Long, setu al lizher hon eus kaset da hemañ (d'ar 25.10.73) :

Aotrou Pennrener,

Hor c'hevredigezh a gas deoc'h gourc'hemennoù evit bezañ bet lakaet e penn an ORTF hag he deus spi e vo degemeret prestik ar gwellaennoù bihan goulennet pell zo gant selaouerien hag arves-terien Vreizh ar c'hasadennoù.

Goulenn a reomp :

1añ) Ma vo krenvaet Radio Kimerc'h (Studio Brest) evit ma vo klevet e Breizh a-bezh, ha nann hepken en ul lodenn vihan e kuzh-heol hol ledenez.

2) Ma vo kasadennoù brezhonek skinwel ar meurzh hag ar merc'her, kasadennoù ne badont nemet 1 vunutenn 1/2 (90 eilenn), hiraet en un doare dereat.

3) Ma c'hello protestanted Breizh, evel ma ra pell zo ar gatoliked, skrinañ war ar skingomz servijoù brezhonek da geñver gouelioù relijiel bras ar bloaz. Bloavezhioù zo gant holl bastored Breizh.

4) Ma vo kasadennoù skinwel « Breiz o Vev » ar merc'her hag ar sadorn bep sizhun e-lec'h bep 15tez evel bremañ.

Kontañ a reomp warnoc'h, Aotrou Pennrener, evit ma vo sevenet hep dale ar goulennoù dister-se.

Setu ar respont :

« Ho koulennoù n'int ket hon afer ha setu e pedomp renerezh ar skinlec'hioù rannvroel d'ober war o zro. »

Evel just, kelou ebet abaoe, ha sur a-walc'h kaer a vo gortoz e chomimp ur wech muioc'h gant hor fri war ar gloued !

Bremañ fellout a ra dimp goulenn digant hor mignoned hag-en e talvez ar boan kenderc'hel gant an hevelep doare da bediñ ha da aspediñ ? Daoust hag en defe unan bennak ur menoz da ginnig dimp evit ma resevimp a-benn ar fin estreg digarezioù kleuz ha promesaoù ne zeuont morse da wir. Mennet e oa bet en em glevout evit tremen hep paeañ ar skodennoù keit ha ne vije ket bet roet dimp gwellaennoù dereat, met an heklev a voe dister a-walc'h ha dilezet e voe ar menoz.

Lavarit dimp ho soñj ha marteze e vo tu d'en em glevout evit un ober efedusoc'h eget hol lizheroù aspediñ da rener an ORTF.

« Interviewed » omp bet nevez zo gant ur c'helaouenner, implijad an ORTF e Brest, ha lennet hon eus al lizher da vMarceau Long dirak ar mikro. Sur a-walc'h ez eo bet kavet re zispac'hus, rak n'eo ket bet meneget an disterañ gant ar skingomz. Pa labourer dindan lagad Pariz ne c'heller ket ober, siwazh, evel ma vez c'hoant !

Skodenn-vloaz hor C'hevredigezh, bepred (20 real (5 lur) ha gant ur c'houmanant da « Breiz-Dihun » : 15 lur. C.C.P. 2031.55 T Itron Omnes.

BREIZ — Pajenn 10

